

# KANAOUEN ER MESSERIEN GLESKERET ENEBOURIEN A REPUBLIQUE

1  
Breman pe hon di souci, a fall e oale'h an amzer  
E han de dapat ma fleuen, de lakat liou var paper  
A de lakat ma speret, composi eur chanson  
Divar ben monet de voti, er constitution.

2  
Daou parti e zo in France, bopret e non enebie ;  
Darn voa evit a république, darn all evit a roue.  
Henep da referendum, voa tout e noblicite  
Pere ne voanket kontent, deuz er lezeno nevez.

3  
Kar gouelet e memp a nê, ia dar pemp e vis mai,  
Henep de referendum, evel da viz here,  
Kalz de zoutte lavare, o ia dre o rezon  
Penaoz voant attaquet re, gand er constitution.

4  
Da zi guentan a nani braz, in penn er vataillon,  
A neva hoant eur vech hoas, de zonet var er tron.  
Ne voa ket bet re sever, keitte voa e commandi  
Ne mez bouret eo dan i ben, e gand santier Vichy.

5  
Gand profitourien er brezel, a reo ar marché noir,  
E gave dan laret voa zür, de gavet er victoire.  
Tout e renez pad er brezel, lavare voa eun den fall,  
A breman hê o h'Otro Doue, de remplaci Laval.

6  
A neuze e voa om breuder, a hoarézet koéffou guen,  
Pere a neva aouën, de goll er skoll kristen.  
Nemed pe homp in republique, a memez gouarnement  
Ne vo ket eur scol dan otro, ag un all dar paysan.

7  
A hoas e voa an dut gentil holl vestrou an douar,  
In kever o mermourien, deusket ken memez pouvoir.  
Kar lezenno zo bet graed, in kever er paysanted,  
Pere gand an Otronet, nenket hoas digeret.

8  
Ag evit lared dec'h buan, ebarz in ber komzo  
E memp gouelet hoas reo vad, mestrou in usino.  
Graet e deuz o holl possible, d'interri a république.  
Bremen vo torred cemp om fenn, gand er bombe atomique.

9  
Ken koulz a me e peuz gouelet, evar er journalo,  
Zo ama hoas treitorien, e klask commandi er vro.  
Kar bean man an otro Paul, ag i kamarad Edouard  
E deuz planted ar republique, hoech bla ebarz in douar.

10  
Bopret maint e combatti, a republicanet,  
O na barz er pen kentan, e deuz hoant d'eruet.  
Nemed mar defe er malheur, ia hoas dom kommandi  
Veont leusket mez er prisonniou, miliciennet Vichy.

11  
A neuze deuz in tual, 'evoa er labourerien,  
De lared ia da republique, henep dan treitorien,  
Kar daou blos zo tremened, boe eo libered om bro  
A goassoc'h evit biskoas, e memp privationo.

12  
Er guin ru ag an aman, e zo stard de gayet,  
Gouelet remp var er journalo, petra ve gante graet,  
Kig moc'h ne memp ive, goudé bean production,  
Peguir veont embarquet, bemde var er vagon.

13  
Klevet veint ive a rouspetti, eur certain higuerien,  
Var digare deo ket louined, evit priz o c'hrôhen.  
A koulzcoude memp gouelet, ia duman barz in kaer  
Goerzed gante o fongno, ag ed dober o rentier.

14  
Lavared ran ive eur gomz, deuz paotret er bleud guen,  
Kar diskouet deuz bet demp, e voa daou sort fransijen.  
Daou sort bara e voa zur, ebarz er boulangerie  
Nemed ne neoket dan Otre, e vije er brenn da zebie.

15  
Ag e ouelet kemed mam, me halon a ve trist  
Kar e spen ze e homp hoas, ia privet deuz er jist  
Na pe zeuo tom in heol, duze in kraëis er parko,  
Memp a ello devan dour, ia deuz er feuteno.

16  
Ag e gredan heo eru poent, lakat eurz barz an ty,  
Petraman e hemp prestig, der parkou de beuri.  
Pe a vo red demp ober, evel remplassant Doue  
Moned dober tro er barouz, deuz in eill ty d'eguile.

17  
Mez breman tud vian er vro, in trezomp labourerien,  
E helfomp non rejoissan, gand eur galon laouen.  
Delhen e remp an drapeau tricolore in nom bro  
Ia dre nespet da noblence, na do hamarado.

18  
Ia diskouet e zo dê, gand an oll fransijen,  
Na ne houennont ket ken; nan deuz er treitorien,  
Na ouelomp nemed brezel, ag an domination  
Neo ket an nani diouhar hir, e memp laket var an tron.

19  
Pe na houlenomp ket ober, ever a raê hon zud koz,  
Monet d'empech er gleskeret, da kana deuz an noz.  
Epäd in noz gand peb a vaz, e vessan er gleskeret  
Evit me halche an Otrou, ag i itron kousket.

20  
Lavaret e ran hoas eur gomz, ia arog finissan,  
Houlenomp peuc'h a buez vad, treman veomp er bed man,  
A breman evit pemp blos, e zo fin dar politique  
Ag er justice evidomp tout, dindan ar République.

# ZON AR MERHET FARO

1  
Bretonnezet a Vreiz-Izel, tud e bep sort noajo,  
Digoret o diou skouarn da jilao ma homjo,  
Ia paotret a merhet koz a bep sort qualite  
E hemp d'ober assemblez eur zel var er vue.

2  
Var er vuez zo tremened a boe er brezelo,  
A partout lec'h e valeomp e zo chanchemencho.  
Eruet e ra gane monet pell deuz ar ger,  
Galoupat ran ar Côtes-du-Nord evel er Finister.

3  
A vechou e han ive beteg ar Morbihan,  
Partout lec'h me tremenan a ouelan chanchement  
A pe voamp ni tud yoank foned dan assembleo  
E vije guisket an dud pep hani guis e vro.

4  
Ar merhet barz ar Côtes-du-Nord deva eur hoef sparfel,  
A dao stagan nean er fad pe vije kreou in avel.  
Merhet kernez er Finister Koeffou rond ha bian,  
Kalz tostoc'h de leign o fenn evit reo er Morbihan.

5  
A goude ma ree glao ne vijent ket distresset,  
In kichen er hoeftiou braz dustu vije placet.  
~~Nemed deuet e heo et mod gand an dimezellet~~  
Da kavet ive eur toc evel an itronez.

6  
Kar taillet ve tout an traou e gand er brezellou  
Veket kavet ken amidon evit feri koeffou.  
Med a reo yoank zo bremen venket embarasset,  
E dap eun toc var o fenn a var rog partiet.

7  
Nemed var lerc'h er brezello ve lezeno nevez,  
Ken koulz ebarz in Treguer evel barz in Kernez.  
Dustu goude ar brezel all eur mod evoa deuet  
Gand ar merhet trohan e bleou evel deuz ar paotret.

8  
Ia touzet gante o bleo in tu a dreo deuz o fenn,  
Hevel deuz eur assassin foned dar guilloton.  
Nemed boe ar brezel ma a hent goal dirollet  
Prestig veont ket anveet in touez ar paotret.

9  
Kar gouelet e veont bremen partout barz er herio.  
A gante bragueier hir ag ive chupenno.  
Pakoted a ve o fenn e gand o turuben,  
A tallonnou o bottou hevel deuz diou poenten.

10  
Duet in dro o diou lagat, a ru deuz o muzello,  
Ag allies peintured gante o divino.  
Bean deuz ivé eur carten evit galoud fumi.  
A hoezed ar plac'h yoank pa ve a tivogedi.

11  
Allies a veint gouelet ebarz an assembleo,  
Eur cigaretten no beg evel er baotredo,  
Eur sacoche a veive a strubl leuz o skoa  
Evit geri butun, ar peinture a tout an tra la la.

12  
A setu aze mignonned bremen a gnis nevez  
Ag a ouelet kemet man e sonjemb in meulargez.  
A bremen arog finissan e gan fomp a vonez uel  
Voket impliet ar peinture gand merhet Breiz-Izel

## GOECH ALL PE VOAN POT YOANK

1  
O goech all pe voan me yoanc  
Croyez-moi si vous voulez,  
Evit lared dec'h franchement  
Oui il fallait travailler.

2  
Deg buguel evoamp da vevan  
Et avec 10 sous par jour,  
Pe voa ma zad e tevejetta  
N'y avait pas de secours.

3  
Ne moa ket nemet tri-zec blos  
Quand je suis parti commis,  
Evit gonet ma bara  
Et miserer dans la vie.

4  
Bemde vijen e labourat  
Car je savais travailler,  
Koulz er parc evel ar prat  
Ou bien autour du fumier.

5  
Monet reen gand er hezek  
O oui pour tourner la terre,  
Allies e vijen glebiet  
O j'étais dans la misère.

6  
Evar er maez ebarz in néchou  
Je pataugeais dans la boue  
A me mez ebarz er parkou  
J'étais sale jusqu'aux genoux.

7  
Er lann e vije da pilat  
Et toujours après la nuit,  
Gleb dour teill vije ma zillat  
Souvent j'étais sous la pluie.

8  
A da goangna var marc'had  
Des patates et du lait,  
Me na reen ket re koiffad,  
Car du tout je les aimais.

9  
Hoas a hen da nosveta  
O chercher une bonne amie  
E neur kana tra la la  
Et m'amuser dans la vie.

10  
A dalc'h mad barz e nosvejou,  
O moi je chantais des danses  
Ag eru mad gand er merhejou  
Avec ça j'avais de la chance.

11  
Sclouqual ree ar boteier  
Et tout en faisant le tour  
Ne sonjen ket barz er parkeier  
Ni même pas dans le labour.

12  
Bep noz e vije in dansou  
Au bourg ou à la campagne  
Dar houlze ar yoankizou  
S'amusaient bien en Bretagne.